

Gorreoù : Degas 'reomp da soñj ag ho marv,
Aotrou Krist savet da vev,
Ha gortoz a reomp ho tistro.

Hon Tad : hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet, Ho rouantelezh degaset deomp, Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañv.
Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek, Pardonit deomp hor pec'hedoù, 'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp, Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion, Met hon diwallit doc'h an droug.

Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue, ... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :

R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.

Oan Doue :

**Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : ho pet truez doc'homp ! (bis)
Roit deomp ar peoc'h !**

Kent ar gomunion :

*Ar beleg : Setu Oan Doue, setu an Hini a lam pec'hed ar bed :
Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.*

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

Komunion :

1 Meulit an Aotrou Doue, C'hwi holl, e draoù krouet,
Traoù hag a weler splann, traoù ha ne weler ket,
Meulit e holl gelloud hiriv, àrc'hoazh, bemdez,
Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !

2 Meulit an Aotrou Doue, ha yenion ha tommder,
Ha c'hwi hañv ha goañv, teñvalded ha sklaerder,
Noz dall a zu an douar, deiz kaer a splann en ne,
Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !

4 Meulit an Aotrou Doue, Arc'haeled hag Aeled
O chom e lein an neañv, e palez an Dreinded !
Get ho telennoù aour, lârit kanenn an Ne,
Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !

Kan-dibenn :

Rouanez an neañv, kemerit joe,
Allelouia ! Allelouia !
Rak ar frouezh ag ho tigostez
Allelouia ! Allelouia !

A zo savet bev ag ar bez,
Allelouia ! Allelouia !
Pedit 'eidomp an Aotrou Doue,
Allelouia ! Allelouia !

Deoc'h, Gwerc'hez, joe ha levez,ez,
Allelouia ! Allelouia !
Jezuz 'zo savet ag ar bez,
Allelouia ! Allelouia !

Parrez Ker Anna

3^e Sul Fask

4 a viz Mae 2025

Kan digor : Alleluia ! Alleluia ! Alleluia !

1 D'ar sul vintin, da c'houlou deiz An disipled lan a dristez A dostaas da welet ar bez.	5 Eürus ar re en deus kredet Daoust ma n'o deus ket gwelet ! Eürus 'vint en neañv da berped !
3 Un Ael e gwenn, er bez chouket, Dezhe o zeir en deus lâret : Er Galile er c'havehet !	6 En deiz gouel-mañ get levez A vouezh uhel kanomp da Zoue Gloar, meuleudi ha trugarez.
7 Lâromp get izelded-kalon, Get karantez, get devosion : Bennozh da Zoue ha melasion !	

Salud d'ar bobl :

*Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :*

Respont : Ha get ho spered !

Asperges : Allelouia !

1 Ha gwelet am eus an dour bev É strinkiñ a galon ar C'hrist ! An holl re 'vo gwalc'het en dour-se A vo salvet hag a gano :	3 Gwelet am eus ivez an Templ Digor da virviken d'an holl Ar C'hrist a zeu en-dro get trec'h, A ziskouez gouli e gostez.
2 Ha gwelet am eus ar vammenn É tont a vout ur stêr divent ! Ha bugale Doue, holl tolpet 'Gane laouen a vout salvet :	4 Gwelet am eus ivez ar Gomz É reiñ deomp peoc'h hon Aotrou Doue. An holl re a gred en e anv A vo salvet, hag e kanint :

Gloria : Gloria in excelsis Deo ! (2 wezh) In excelsis Deo !

Peoc'h àr an douar d'an dud karet getoñ ; Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h adorin a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an neañv, Doue an Tad hollgellougek.
Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwi hag a lam pec'hedoù ar bed, ho pet truez doc'homp. C'hwi hag a lam pec'hedoù ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwi hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp.

Rak C'hwi hepken a zo santel. C'hwi hepken a zo Mestr. C'hwi hepken a zo uhelmeurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !

Lennadenn getañ : Lennadenn tennet a levr oberoù an Apostoled.

Degaset e oa an abostoled dirak ar c'huzul-Meur, hag ar beleg bras a lâras dezhe : «Gourc'hemennet groñs hor boa deoc'h chom hep kelenn an anv-se ; ha setu ho peus leuniet Jeruzalem get ho kelennadurezh. Hag e faot deoc'h lakaet da gouezh àrnomp gwad an den-se ? » Respont a reas Pier hag an Abostoled : «Ret eo sentiñ doc'h Doue kentoc'h evit doc'h an dud. Doue hon tadoù en deus adsavet Jezuz ho peus-c'hwi lakaet d'ar marv doc'h er stagiñ doc'h ar c'hoad. Hennezh eo en deus Doue uhelaet dre nerzh e zorn dehoù hag e lakaet da vout renour ha Salver, evit ober da Izrael cheñch buhez ha kaout ar pardon ag e bec'hedoù. Ha ni a zo testoù da razh an traoù-se, ni hag ar Spered Santel en deus Doue roet d'ar re a sent doc'h tañ.

Goude bout skourjet an abostoled ha gourc'hemennet dezhe chom hep lâret anv Jezuz, e oant bet lezet da vonet. An Abostoled a guitas ar Sanedrin, laouen bout bet kavet dign da c'houzañv dismegañs abalamour da Jezuz.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Psalm 29 :Ho kanmeuliñ a ran, Aotrou, rak ma dieubet ho peus.

Ho kanmeuliñ a ran, Aotrou, dre ma ho peus ma adsavet,
ha n'ho peus ket laouenaet ma eneberion diàr ma c'houst.

Aotrou, salvet ho peus ma eneañv ag ar marv

Ha ma zennet a vesk ar re a ziskenn er foz.

Kanit gloar d'an Aotrou, c'hwi holl, e dud fidel,

Rantit bennozh d'e anv santel,

Rak ne bad e gounar ken nemet ur momant,

E drugarez avat a chom a-hed ur vuhez.

Selaouet en deus an Aotrou ha truez en deus bet doc'hin,

An Aotrou a zo bet ma skoazellour :

Chenchet en deus ma c'hlemmagan e dañs.

Aotrou, ma Doue, da virviken e faot din ho meuliñ.

Ëil lennadenn : Lennadenn tennet a levr an Diskuliadur

Me, Yann, a welas neuze hag e klevis bouezh Aeled niverus en-dro d'an tron, d'al loened, ha d'ar re gozh ; miliadoù ha miliadoù a oa anezhe, ha youc'hal a raent en ul lâret : «Dign eo an oan bet lazhet da resev ar gelloud, ar binvidigezh, ar furnez, an nerzh, an enor, ar gloar, ar melasion !» Ha pep tra kroueet en neañv, àr an douar ha dindan an douar, 'vel àr ar mor, ha kement tra 'zo enne, me o c'hlevas ec'h embann : «D'an hini a zo azezet àr an tron ha d'an Oan, melasion, enor, gloar, gelloud da virviken.» Hag ar pevar loen a lâras : «Amen !» hag ar re gozh a stouas hag a adoras. Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Aviel : Allelouia

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : **R/ : Ha get ho spered !**

Ar beleg : Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Yehann.

R/ : Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !

Goude-se en em ziskouezas ar Jezuz d'e zisiplad àr ribl mor Tiberiad ; ha setu amañ penaos en em ziskouezas. E oa asampl get Simon-Pier ha Tomaz, an hini lesanvet Didimos ha Natanael hag a oa a Gana e Galilea, maboù Zebedeia, ha daou disipl arall. Ha Pier da lâret : «Monet a ran da besketa.» Hag e lâront holl dezhañ : «Monet a reomp, ni ivez !». Hag int da vonet, ha da grepel er vag. Met e-pad an noz ne dapazont netra ebet. Pa oa tarzhet an deiz, Jezuz ha donet àr ribl ar mor ; met an disiplad ne ouient ket e oa Jezuz e oa. Ha Jezuz a lâras dezhe : «Paotred, n'ho peus ket un dra bennak da zebriñ ? – Nann», eme-int. Ha Jezuz da lâret dezhe : «Taolit ho roued en tu dehoù d'ho pag hag e kavahet.» Hag int d'en teurel, met ne oant ket evit er sachiñ gete en-dro abalamour d'an niver a besked tapet e-barzh. Neuze an disipl-se karet get Jezuz a lâras da Bier : «An Aotrou eo !» Simon-Pier é klevet e oa an Aotrou a wiskas un tamm dilhad – rak en noazh e oa – hag en em daolas er mor. An disiplad arall a zas d'an douar en ur stlejiñ ar roued leun a besked ; ne oant ket gwall bell ag an douar : un c'hant metrad bennak. Pa ziskennazont àr an douar e welazont eno un tan glaou bev, ur pesk àrnañ, ha bara. Jezuz a lâras dezhe : «Degasit un dra bennak ag ar pesked ho peus tapet aze.» Simon-Pier a gras en-dro er vag hag a sachas d'an douar ar roued leun a besked bras ; kant tri ha hanter-kant e oa anezhe ; hag en desped dezhe bout ken niverus ne oa ket roeget ar roued. Jezuz a lâras dezhe : «Dait d'ho lein !» Hini ebet ag an disiplad ne grede goulenn getañ : «Piv ous-te ?» rak gouiet a raent e oa an Aotrou. Neuze e tostaas Jezuz hag é kemer ar bara e roas anezhañ dezhe, ha kement-all a reas get ar pesked. An deirvet kwezh e oa da Jezuz en em ziskouez d'e zisiplad abaoe ma oa dihunet a-vesk ar re varv.

Setu Komz an Aotrou : **R/ : Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !**

Kredo : Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek, Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, daet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad, a-eno e tay da varn ar re vev hag ar re varv. Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

Pedenn hollbedel :

Aotrou, hon Doue, ô Tad Santel, selaouit hor pedenn !

Lid ar profoù : ar beleg : Pedit, mam breuder, ma plijo get Doue an Tad hollgelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :

R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.

Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

R/ : Emañ troet trema Doue !

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

R/ : Just ha santel eo !

Santel : Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr an Ne hag an douar !

Lan eo get ho kloar an ne hag an douar : **Hosanna e lein an Ne !**

Ra vo benniget an hani a za e anv Doue : **Hosanna e lein an Ne !**